

KANTIK ITRON VARIA KERINEK

## Diskan

- Itron Varia Kerinek,  
Savit ho torn ken galloudek,  
Da venniga ho pugale  
Euz an Arvor hag ar Mene !
- 1-E Kerinek, parrez Poullan,  
E kaver eur chapel vihan,  
Bet savet gant hon tadou koz  
D'eoc'h, Rouanez ar Baradoz.
- 2-Parrez Poullan a bep amzer  
Ho karas stard, Mamm hor Zalver;  
C'houi, Mari, evel eur vamm vat,  
A garas Poullaniz dalc'hmad.
- 3-Ar poanier paour, war hor maeziou,  
Vit kaout kalon en e boaniou,  
War-zu an Nenv a dro bemdez  
Da c'houlenn ho pennoz, Gwerc'hez.
- 4-Pesketer Treboul alies,  
Dindan ar barr-amzer diaes,  
En e vag, ho ped kalonnek,  
Gant fizians, Gwerc'hez Kerinek.
- 5-Da Gerinek omp deut hirio  
Mari, da veuli hoc'h hano,  
Ha da c'houlenn ho pennoziou  
Evit hon tud hag hor maeziou.
- 6-Mari, refuj ar bec'herien,  
Bennigit ho pardonnerien,  
Ha roit d'eomp ar grasou nerzuz  
A red eus kalon Mamm Jezuz.
- 7-Evel eul labousig d'e neiz,  
E tiredomp aman gant feñz:  
Gag Kerinek, c'houi vo bepred  
Hon neizig tra ma vimp er bed.
- 8-Ha pa zigouezo ar maro,  
Gant fizians ni a lavaroc'h:  
Deut omp betek dor ar Vuhez,  
Digorit d'eomp an nenv, Gwerc'hez.